



Diskouezadeg
Eus al loened
d'an dilhad

LIVE 1
ADALEK
3 BLOAZ



2 a viz Even – 31 a viz Kerzu 2023
MIRDI BREIZH AN DEPARTAMANT
KEMPER

Degemer mat en diskouezadeg *Eus al loened d'an dilhad* e mirdi Breizh an Departamant.

Deñved, moc'h, kizhier, balafenned... kement a loened aet da guzh e-touez dilhad ar Vretoned 150 vloaz zo.

Ha gwir kement-se ?

- Blev loened zo a veze implijet evit sevel dilhad.
- Anvioù loened zo a veze roet dan dilhad a-wechoù, pe stummoù pe tresoù loened zo ivez.

A-bouez e veze an dilhad e sevenadur hengounel ar vro.
A-drugarez d'an tresoù, d'al livioù pe d'an tresoù implijet evit sevel anezho e c'helled gouzout orin an den a zouge an dilhad, petra oa he oad pe he micher.

Un nebeud reolennoù a vez doujet out er mirdi :

- Chom hep tostaat re diouzh an oberennoù
- Chom hep stekiñ diouzh an oberennoù
- Chom hep diskouez un dra bennak gant da greion

Padal, er mirdi e c'hellez :

- Kaout plijadur, ha sellet ouzh an traoù war-ziskouez
- Hunvreal, pourmen, hag ivez dont en-dro
- Sevel goulennoù
- Chom hep gweladenniñ pep tra !



Gwelet a ri dilhad a veze douget war...



A-drugarez d'al levrig-mañ e c'helli kemer plijadur hag ober anaoudegezh gant an objedoù a zo kinniget en diskouezadeg-mañ.

Kavout a ri ur fichenn gant pegennoù evit ma c'hellfes respont ouzh goulennoù zo. Ma n'eus hini ebet ken e c'helli goulenn kaout lod en degemer ar mirdi.

Plijadur deoc'h !





Kant hanter-kant vloaz zo e veze bepred ur c'hoef war penn pep maouez a oa er vro. A-drugarez d'ar c'hoefoù-se e c'helled gouzout eus pelec'h e oant. Anvioù loened a zo bet roet da veur a hini abalamour d'o stumm !

Amañ da skouer ez eo bet awenet stumm ar c'hoef gant hini ur wennilienn.




Diouzh peseurt loen e tenn o anv ar c'hoefoù amañ dindan ?
Gra ul liamm etre pep koef hag ul loen.



Diskouarn ur c'hazh




Ur rae



Ur grilh-mor

Kollet eo bet e dres gant an daledenn-mañ eus a vro-Vigoudenn. Heñvel ouzh ul loenig a nij eo.

Klask anezhañ er sal, ha tres anezhañ.



Mat da c'houzout !

Lodenn chouk koef bro-Vigoudenn eo an daledenn.



150 vloaz zo, ne vije gwelet gwaz ebet o vont er-maez hep e dok ! Hag evel evit pezh a sell ouzh koefoù ar maouezed e c'helled gouzout eus pelec'h e oant, pe peseurt micher a oa ganto.

Kollet o zok gant ar martolod, ar soner hag ar gozetaer !

Sell mat ouzh ar poltriji a gavi er sal, sell ouzh da begennoù ha peg an tok mat war benn pep gwaz.



Mat da c'houzout !


Mont a rae ar gozetaer a atant da atant evit tapout gozed. Rouez-tre eo ar vicher-mañ hiriv an deiz..

Soniñ, da lâret eo c'hoari muzik a ra ar soner e-pad an devezhioù gouel, evel an euredoù da skouer. Amañ emañ ar sonerien daou-ha-daou gant bombard ha binioù.

Ar vartoloded a veze war o bag o verdeiñ war holl vorioù ar bed.

Sell ouzh dilhad eured kaer ar c'houblad-mañ. Bleuiñ orañjez a ya da ginklañ sae ar plac'h nevez. Gant koar e vezent graet, hag anavezetre e oant e bro-Frañs 150 bloaz zo !

Klask bremañ ar 4 diferzh etre skeudenn an dud nevez hag an hini a kavi war-ziskouez er sal.





Blev loened eo a veze implijet gwechoù zo evit sevel dilhad : gloan deñved, feur lapined, blev givri...

Toull eo ar feurioù-mañ.

Klask anezho er sal, ha dres anezho gant da begennoù.






Mat da c'houzout !

Ur pezh dilhad a wisker war e zivskoaz eo ur belerinenn.



Klask an dilhad-mañ er sal, ha liamm anezho gant o livioù.





War an dilhad gouel e veze brodet tresoù, lod outo o tennañ diouzh loened, ha lod all gant anvioù loened : dent bleiz, kerniel maout, drein pesked...

Klask ar pegennoù gant an tresoù a zere evit gellout reiñ o broderezhioù d'an dilhad.

Dent bleiz



Biskoul



Pluñv paun



Drein pesked

Mat da c'houzout !

Un tres savet gant nadozioù ha neud kotoñs pe neud seiz eo ur broderezh, a c'heller ober gant an dorn pe gant ur mekanik. Graet e vez ur broder pe ur vroderez eus an dud a ra broderezh.



Botoù-koad a veze gwisket war ar bemdez 150 bloaz zo. Lod a veze fichet gant plouz, doublet gant chaosonioù mezher pe gwisket gant loeroù tev evit kaout tomm ha chom hep kaout poan ivez ! Miret e veze ar botoù-lêr evit an devezhioù gouel.

N'eus na troad kleiz na troad dehoù d'ar re votoù-koad, met daou-ha-daou ez eont bepred ! Klask pep hanter re votoù-koad e-touez ar pegennoù ha peg anezho e-tal ar votez-kod a re evit sevel ar rumm en-dro.



Gant gloan eo bet gret ar bodreoù-se. D'ar soñj, perak e vez implijet gloan, an danvez-se diwar deñved ? Kelc'hiañ a ri ar respont mat.

Tomm eo ar gloan

Rust eo ar gloan


Solut eo ar gloan

Un danvez burzhudus eo ar gloan



Liv ar skeudenn-mañ en ur zoujañ ouzh ar c'hod livioù hag e c'helli diskoachañ peseurt loen a weler treset alies war gofoù bro-Vigoudenn.

Gellet a ri livañ en dachenn ar c'hoarioù a gavi e dibenn an diskouezadeg-mañ, pe pa vi er gêr !



Deuit d'hon heul ha rannit ho kweladenn war ar rouedadoù sokial.

 [musee.departemental.breton](https://www.facebook.com/musee.departemental.breton)

 [musee.breton](https://www.instagram.com/musee.breton)



Moullerezh Kuzul-departamant Penn-ar-Bed
© Empennet gant : Mirdi breizhek an departamant 2023
Luc'hskeudenoù a-drugarez da : Bernard Galéron / Kaset da benn gant : TraductionGrafik
(Affiche, illustrations) : Atelier Bartleby
Imprimerie du Conseil départemental du Finistère